

Meurriad

#32

BANNOÿ-TRESE
HA CHOARIOÿ!

PETRA
A REOMP
AMAN
?

DIROLL
EO AR
MOR...

ZETENN VIZIEK - EOST 2005 - 5 €

• KICOBY • LE TUR • LOL • FOURNIER • BALAN •
MORINIÈRE / TABEK • ROBOT • MORVAN • SANGLA • LE DORVEN



Ar blaz, da vat




Classiques, Cœurs-de-Bœuf, Branchées, Romaines, Authentiques, Cocktails, Cerises pe Cœurs-de-Pigeon, Sun Délices, Succulentes pe Bellaroma... mell-divell pe dre viokadoù, tomatez eus an dibab a vez kinniget gant

Saveol, dezho blazioù soutil ha disheñvel evit plijadur pep hini...

Dre ma fell dezho doujañ ouz an natur e implij saverien tomatez Saveol ar "Gwarez Biologel ha Naturel" : sevel a ra Saveol amprevaned "mat" a-benn distrujañ, ez-naturel, an amprevaned noazus evit ar plant.

Pa vez an natur o wareziñ an natur, n'eus netra natureloc'h !

Tomatez, skilbebr, sivi, konkombrez, bleunioù a vez produet gant saverien Saveol



Kevizad savet da benn gant skouadrenn Europa


BP 40
21, av. ar Pont
29470 Plougastel, BREIZH
Tel 33+ (0)2 98 40 30 30
Fax 33+ (0)2 98 40 29 74
www.saveol.com

saveol
La saveur pour de bon



KOUN

R. Le Fur





ME AN HINI EO.

MANKET 'TEUS DIN.

A-BOAN MA 'Z ON BET KUIT E-PAD DIV EUR, MA C'HALONIG.



HA N'EM EUS KET DI-SONJET AC'HANOUT

O ! TRUGAREZ !



SALJIDIÑ A RA AR WER-ZHEREZ AC'HANOUT.

KLAODIA ? JENTIL EO, LÂRET A RI DEZHI KEMENT-ALL ?

MMMM... PRALIN

SOUEZHUSAT TRA, EUS O FERZH.

ARABAT BEZAÑ DROUK GANTO, GOUZOUT A REZ...



REIZH EO O EMZALC'H

NE GRED KET DIT ?



O ! KREGIÑ A REZ DA VALAN SONJOÛ DU, TE. ALE, DEUS DA BOURMEN UN TAMM.

AN DEVEZH A-BEZH AM EUS TREMENET AMAN. EZHOMM 'M EUS MONT ER-MAEZ.



NAG A VAD A RA...

... KAOUL UR BANNE HEOL !



... GWELLOC'H C'HOAZH GANT UR VOESTAD PRALIN.

E ! GOUSTADIK ! ARABAT DEBRIN ANEZH HO NOLL EN UR WECH !

MA 'TEUS POAN-GOF E VO DIN DA ZOUBEN AC'HANOUT BETEK AR GÉR.



BEZ DINEC'H, MARC'HEBER FEAL. ME ZO KEN SKAÑV HAG UR BLIENN.

SELL : HOP ! HOP !

CHIT ! GOUSTADIK ! SACHET E VO EVEZH WARNOMP...

TAMM EBET. NE WELONT KET AC'HANOMP ZOKEN. HA FORZH PENNOS NE REOMP KET FORZH !

MEMESTRA ! PE OAD OUT-TE ?

AN OAD KAER, AOTROU, HA TENNAÑ A RAN...



BILL !

... GOUNID OUTAÑ. SELL OUZH HOMAÑ !

PEBEZH PENN ! MA N'EO KET TRIST EVITI !



UN ITRON "PENNDU TRENK-PUT" HAG A WEL PEP TRA WAR AN TU FALL.

O...



NA TAER OUT MA LABOUSIG.



MARSHALL BOB



Komzoù YAOUANK



Lenaig sonerez akordeoñs



Meuriad : Lena, abaoe peur e c'hoariit akordeoñs ?

Abaoe eizh vloaz e sonan akordeoñs, hag a-raok em eus desket ar piano e-pad nav vloaz.

M.: Perak an akordeoñs kentoc'h eget ur benveg all ?

Kroget e oan gant an akordeoñs un tammig dre zegouezh. C'hoant am boa deskiñ seniñ gant ur benveg disheñvel diouzh ar piano, ha c'hoant am boa deskiñ ur benveg hengounel. Va soñj kentañ a oa seniñ bombard. Met va mamm he doa lavaret din ur wech e anavez ur paotr, Paul Ar Gall, a roe kentelioù akordeoñs diatonik e Landerne. Da gentañ ne blijte ket re din ar soñj-se, ne blijte ket re din an akordeoñs kromatik, ar *musette*, ha soñjal a raen e oa memestra diwar-benn an diatonik. Met, 'benn ar fin em boa cheñchet spered, hag 'm 'oa soñjet "perak pas ?" ha kroget e oan gant ar c'hentelioù e Landerne. Ur soñj mat e oa, 'benn ar fin!

M.: Ha penaos eo deuet deoc'h ar soñj seniñ en ur strollad ?

Sonet 'm eus er festoù-noz unvan gant va akordeoñs e-pad daou vloaz bennak Seniñ e-unan n'eo ket anat tamm ebet, memes ma 'z eo ur skol vat evit deskiñ

seniñ ha bezañ barrekoc'h war ar benveg. Ma faziit e rankoc'h bezañ gouest da gendec'hel da seniñ memestra. Diaes eo. Neuze em eus bet c'hoant seniñ gant tud all ivez, evit gouzout penaos e oa seniñ gant biniou all. Pa oan e klas termen em boa kemeret perzh en ur strollad, gant un nebeud tud eus va lise, evit ar genstrivadeg « Interlycées ». « Da bep lec'h » e oa anv ar strollad-se. Ne oa ket deuet ar maout ganeomp, met ur boelladenn vat e oa bet, ha goude omp bet pedet da seniñ en un nebeud festoù-noz. War-lec'h am eus ehanet e-pad ur bloavezh gant ar sonerezh abalamour da va studioù, ha goude em eus graet anaoudegezh gant tud *Torr-Penn* a oa o klask war-lec'h un den o seniñ akordeoñs.

M.: Petra eo bet buhez *Torr-penn* betek-henn ?

Istor *Torr-Penn* n'eo ket un istor simpl. Seizh vloaz 'zo e oa ur vandennad mignonned eus Brest o soñj sevel ur strollad dañs, ur seurt kelc'h keltiek hep gwiskamantoù. *Digor kalon* e oa anv ar strollad-se. Met ret e oa kaout sonerezh ivez evit lakaat an dud da zañsal, ha sonerien neuze. Neuze ar re a ouie seniñ e-touez an dud-se o deus krouet ur stroll-

“ Sonet am
va unan er
festoù-noz e-
pad daou
vloaz bennak ”

lad sonerezh anvet *Banne Hini Kreñv*. Daou vloaz war-lerc'h e oa echu gant *Digor Kalon*. Ar strollad sonerezh en deus kendalc'hed da seniñ, met an anv a zo bet cheñchet, hag a zo deuet da vezañ *Torr-Penn*. E-pad pemp bloaz ez eus bet cheñchamantoù e-touez ar sonerien ivez. Da gentañ e oa c'hwec'h den er strollad. An akordeonist a oa aet kuit. Erruet on bet bloaz war-lerc'h. Goude eo aet kuit an daou baotr a gane hag a sone bombard, met den ebet n'en deus kemeret o flas. Goude eo aet kuit paotr ar gitar, hag erruet unan all. Poan hon eus bet evit kavout anezhañ. Hag abaoe nebeut e vez a-wechoù div blac'h o kanañ ganeomp. Buhezek eo *Torr-Penn*!

M.: Plijus eo c'hoari war ul leurren, dirak an dud ? Petra a zegas deoc'h ?

Ya, plijus-kenañ eo. Gwelet 'vez an dud o zañsal war ar sonerezh a reomp, ar sonerezh hon eus labourer, pleustret. A-wechoù e vez gwelet mat e anavez an dud hor sonerezh. Gortoz a reont evit un ton a blij dezho, evel ar polka da skouer. Plijadurus-kenañ eo evidomp. Hag ouzhpenn-se e vez un dra bennak o tremen etrezomp-ni war al leurren ivez, pa vez sonet mat un ton a blij deoc'h. Burzhudus eo, diaes eo da zisplegañ ivez!

M.: Piv eo ho mestr war dachenn ar seniñ akordeoñs ?

Goulenn diaes! N'anavezan "mestr" ebet, da vat. Selaou a ran ur bern traoù. Evit an dud a son akordeoñs e selaouan Jean Coateval, Yves Menez, met ivez Yann-Fañch Perroches, pe c'hoazh Jannig Martin, Yannig

Noguet, ha tud yaouankoc'h ivez ! Selaou a ran ivez tud evel Astor Piazzola, pe Richard Galliano evit an akordeoñs, jazz, pe tango. Hag evit sonerezh Breizh e selaouan ivez kanerien, pe sonerien. Ur bern traoù hon eus da zeskñ diouzh ar biniou all ivez.

M.: Betek peur emaoch'o soñj kenderc'hel ?

N'ouzont ket re. Gant *Torr-Penn* e kendalc'hin e-pad un nebeud bloavezhioù, kredapl-bras. Met marteze e rankin mont kuit eus Breizh ur wech bennak, ha neuze e vo ret din ehanañ. N'em eus ket c'hoant soñjal e ehanin ur wech bennak gant an akordeoñs ! Marteze ivez e vo ret din ober un troc'h un deiz bennak, met betek-henn eo re bouezus seniñ evidon-me. Ur seurt dramme eo !

M.: Petra a vefe ar bravañ abaden e c'hellfec'h kemer perzh enni ?

Ar pezh a blijfe din ar muiañ a vefe seniñ e Sant-Tegoneg evit fest-noz ar bloaz nevez, aozet bep bloaz gant Amnesty International. Abaoe pell ez an d'ar fest-noz-se, ha plijus-kenañ eo. Un aergelc'h dreist-ordinal a zo gant ar fest-noz-se. An dud zo niverus, laouen. Plijus-kenañ eo !

M.: Petra a zisplij deoc'h kalz, war dachenn ar sonerezh ?

N'eus ket kalz a draoù a zisplij din war dachenn sonerezh Breizh. Met an deiz all m'eus gwelet er skinwel bruderezh evit ur bladenn graet gant ur paotr eus Aodoù an Arvor, hag a ra sonerezh Breizh evit an douristed, da lavaret eo en deus adkemeret un ton hengounel, ha graet en deus eus an ton-se ur seurt kanaouenn mod "Star Academy". An dra-se a zisplij din kalz peogwir e vez diskouezet ur skeudenn faos eus sevenadur Breizh e bro C'hall.

M.: Trugarez dit Lenaig hag emic'hañs e vi o kanañ war al leurren un devezh bennak ?

N'on ket re en va aez pa ganan. Neuze kanañ war ul leurren a zo un afer all !



Anv : SPARFEL
Anv Bihan : Lenaig
Cad : 22 vloaz
Al liv a blij dezhi : GLAS
Ar vro : Bro Japon (met n'on ket bet eno c'hoazh)
Ar loen : ar c'hazh
Ar vleunienn : ar fresia
Ar wezenn : ar wezenn derv
Ar ganerez : Liza Ekhdal (ur plach a gan jazz)
Ar ganaouenn : ya des garçons gant les filles des Fabulous troubadours
Ar film : LAS VEGAS PARANO gant Johnny DEPP
Al levr : KISS KISS skrivet gant Ronald DAHL
Ar sport : an dañs

E INIZI BRO HELLAS



Da belec'h eo aet pep hini, hag evit pegeit ? Ha petra eo micher ar pemp plac'h-se ?

	Anv-bihan	Enezenn	Padelezh	Micher
1	Awena			
2	Delia			
3	Katell			
4	Solenn			
5	Klervi			

	Enezenn				Padelezh				Micher						
	Chio	Cos	Lesbos	Naxos	Samos	4 sizhun	5 sizhun	6 sizhun	7 sizhun	8 sizhun	Skrivagnerez	Livourez	Kazetennerez	Poltredourez	Kelennerez
	A	B	CH	CH	D	E	F	G	H	I	J	K	L	M	N
Anv-bihan															
Micher															
Padelezh															

Anv-bihan	Awena	1
	Delia	2
	Katell	3
	Solenn	4
	Klervi	5
	Skrivagnerez	6
	Livourez	7
	Kazetennerez	8
	Poltredourez	9
	Kelennerez	10
	4 sizhun	11
	5 sizhun	12
	6 sizhun	13
	7 sizhun	14
	8 sizhun	15

- 1-N'eo ket aet ar gazetennerez da Lesbos na da Naxos. Chomet eo pelloc'h eget an hini aet da Cos met pas ken pell ha Klervi.
- 2-N'eo ket aet ar gelennerez da Naxos, chomet eo pelloc'heget an hini aet da Lesbos met pas ken pell hag Awena.
- 3-Chomet eo Katell pelloc'h eget al livourez met nebeutoc'h eget an hini aet da Samos.
- 4-Chomet eo ar poltredourez ur sizhunvezh muioch eget Solenn met div sizhunvezh nebeutoc'h eget ar skrivagnerez hag a zo aet da Chio.

evit ho notennoù :

Wil ar c'hwil




JEDADENNOÙ KROAZIET

Leugn an div gael en ul lakaat ar sifroù pe an arouezioù a zere.

309	-		=	
		-		+
150			=	170
=		=		=
	-	59	=	

		56	=	7
+				
	-	7	=	86
=		=		=
485		392	=	

I II III IV V VI VII VIII



A-BLAEN :

1. Luguer - 2. Glac'haren - 3. Zo bet lakaet lâr warnañ - 4. Rakger / Savet diwar gwered ar goell - 5. Diwezh / Labour - 6. Produerien ed - 7. Mab ma breur / Santad a zeu e spered an nen pa gav hir e amzer - 8. Araogenn displeget

A-SONN :

- I. Amprevan - II. Annezidi un enezenn - III. Lous / Treuzfeurme gloan - IV. Pleg-mor - V. Tennen arc'hant er-maez eus ar c'hef - VI. Died / Mestronio - VII. Araogenn kemmesket / Beg - VIII. Endalc'her / Dibenn an anvioù-gwan-verb

KOMZOMP MAT


A-wechoù e klever gerioù amprestet d'ar yezhoù all. Klask ur ger e brezhoneg evit pep hini anezho. Renabet int bet holl war an daolenn, hag int en dizurh, siwazh...

1. Da c'hortoz ar c'heleier e vo ar jeu.
2. Petra a zo en tele en noz-mañ.
3. Lakaet en deus Zidane ur but.
4. E pelec'h emañ an telefon ?
5. Amañ emañ oto ma mamm.
6. Bihan eo sofa an amezeien.
7. Pelec'h 'peus lakaet an telecommande ?
8. Plijus eo emisionoù Radio Bleu Breizh Izel.

COMARI SINKMEL
LAP MOGPELLZ RAK
GOURVANKZEV
LEL PURIEZHREZ
DABENNAOU

LODENNOÙ HEÑVEL

Ha gellout a rez rannañ ar c'harrez-mañ e peder lodenn heñvel ? Met diwall, e pep lodenn e rankez kaout un arouez a bep seurt.



LOSTENNADOÙ

Implij ar silabennoù a-benn sevel gerioù o klotañ gant ar ster roet etre kromelloù.

- DER+HIR+VOU =
- TENT+GIN+DROU=.....
- DAOU+MEN+GE+TIÑ=.....
- RAT+GA+HE=.....
- TAN+KARR+ER=.....
- FI+DENN+KRA+GNA=.....



- a glemm
- kompren fall
- kreskiñ eus kement
- seven
- blenier
- krabisadenn

SPERED AR SPORT

Ro un dalvoud da bep benveg sport ha douj d'ar jedadennoù.

Ur skoazell a vez roet dit :

<10

x x =


: =

+ =


+ + + =

AR C'HWILED

Da bep loen zo bet roet ur sifr. War ar bord e kavi ar sammadoù. Pegement e talvez pep c'hwil ?



11 23 25 20 14 28



- A-BLAEN :**
- Fardañ ul lestr - 2. Lubaniñ / Daoust da se
 - Ger-mell / Diaezamant - 4. Latar / Geus
 - Listri bet gwalc'het - 6. Arme / Metal
 - Tost / Stumm ar verb bezan
 - Spered / Astroù - 9. Den a Iliz / Poultrann
 - C'hoant da zebriñ / Den kozh

- A-SONN :**
- Gwezenn yaouank - II. Spontik / En ul lec'h na weler ket - III. Rannig hetin / Dafis - IV. Frouezh - Etrezek - V. Chomet / Rakger - VI. Frouezh trovanel / Tro-widre - VII. Legumaj - VIII. Unanenn hed kozh / Dougen bri - IX. Rakger / Bac'h / Geo - X. Impalaer roman / Parrez a Vro-Wened

Kinniget gant Patrice MARQUAND

AR GER ESTREN

E pep rummad ez eus ur ger estren. Islinenn anezhañ ha skriv al lizherenn gentañ er c'helec'hig a-dal. E fin e savi ur ger. Pehini ?

KAROTEZ - ONION - KEREZ - POLUR - BETERABEZ

ALC'HWEZ - REOLENN - KELC'HIER - KREION - KORNVENTER

TRELIT - ASKORNEK - MOAN - SEC'H

KI - YAR - OLIFANT - KAZH - HOUAD - AZEN

SKRAMM - URZHIATAER - MEIZIANT - RENKELL - LOGODENN

JEAN-CLAUDE FOURNIER

TRESER BIZU

Petra en deus graet deoc'h gwelet Bizu e brezhoneg ?

Laouen-tre e oan. Ur spered keit a gavan d'ar vandenndreset-se. Setu gwelet anezhi e brezhoneg a oa dispar.

Alies e vez graet dave eus Breizh en hoc'h albomoù. Tresadennoù giz Breizh a zo war dilhad ar vBizizid, da skouer...

Breizh a zo e-kreiz ma buhez, skiaer hag anat. A-orin eus Sant-Ke on, bevañ a ran amañ goude bezañ bet o vevañ e Roazhon, seniñ a ran e bagad Sant-Ke. Evel-se emañ. N'eus ket ezhomm a broùñ netra. N'eus ken bevañ anezho d'ober. Ur wech e lare Nono din e oa Bizu ar skouer gwellañ eus ar bannoù-treset breizhat. « Ne astennit ket arguzer-mou » a lare din « Ne rit ket folkloraj breizhat. Bevañ a rit, ha setu tout... ». Met evit ar pezh a sell ouzh ar vBizizid, ne ouien ket re vat penaos er. Lakat em eus dezho saeoù bras peogwir ne ouien ket re vat penaos

ober. N'ouzon ket penaos e vez o chorf, o anatomiezh, e gwirionez. Triskelioù hag erminoù am eus treset war o dilhad, gwir. Dreist int evit kinklañ.

Penaos eo deuet an anv Bizu ?

En ur skol vras e Pariz e oan gwechall, er bloavezhioù 64-65, hag eno e veze graet ur « bizuhage » jentil. Re ar c'hentañ bloavezh a ranke diskouez doujañs ouzh ar re gozhañ. Setu hon eus bet ar soñj ober ur badj da vezañ douget gant re ar c'hentañ bloavezh. Goude em eus dalc'het an dudenn ha roet dezhi un anv all, Cagliostro, ha perzhioù unan drouk. Met n'en deus ket padet. Deuet eo da vezañ dousoc'h en-dro ha da adkemer e anv kentañ.

Meur a live a zo da lenn ar vandenndreset-se...

Ya. Hag abalamour da se n'en deus ket graet kement a verzh ha ma oan o c'hor-toz. Ar c'hentañ live a zo evit bugale nav vloaz, pe se... Met ne gomprenont ket tout: an daveoù filozofel ha tout...

Un tamm evel Spirou eo. Un den gant ul loen hag a zeu da vezañ e goustiars...

Setu ar perzh am eus roet d'ar c'hebell-touseg. Ar pezh a ra Gotlib gant e vuoc'hig-Doue. Ur « coryphée » a vez laret eus se. Ober a ra evezhiadennoù, bevañ a ra en diavaez d'an istor gwirion. Un tamm evel un eil istor en istor kentañ. Evel ma c'hoarvez gant Spig, ar c'hazh-koad, e troiù-kaer Spirou pe gant Milou e istorioù Tintin. Komz a ra Milou ouzh al lenner met n'eo ket sur e klevfe Tintin anezhañ, e gwirionez.

Un avañtur kaer eo bet Bizu ?

Ya. Seizh albom 'zo bet graet. Unan e dastumad « Pêchés de Jeunesse ». Bonjour Bizu. Daou embanner gant Fleurus ha pevar gant Dupuis. Dre vras, hep klask fogasiñ re, on laouen eus ar pezh am eus graet evel treser. Tregont albom bennak am eus krouet: 9 Spirou, 8 Krannibal, 7 Bizu ha traoù a-zehou hag a-gleiz...

Penaos oc'h en em gavet da dreser Spirou ?

Aet e oa Franquin skuizh gant ar rummad. Tost-tre e oan outañ, en e stal e teuen alies da labourat. Hag hiziv c'hoazh e lakaan anezhañ tel ar muiañ tout en ma buhez, goude ma zad, Dupuis, an embanner, en deus bet soñj ennon met Franquin ne vounte ket achanon kalz. Diaes eo bet. Lihiri kunjijennoù en deus resevet an embanner a-berzh lennerien. N'eo ket anat kemer plas un « Aotrou » ken bras ha Franquin. Gant ar pevare albom, « Tora Torapa » em eus tizhet ha dibaset ar gwerzh a rae ma mestr a-raok.

Ha n'oc'h ket chomet ?

Un dra eo dav gouzout. Perc'henn eo an embanner war an tudennoù. Bez' e c'hell goulienn e vele cheñchet traoù en istor pe en tudennoù. Gant ar bloavezhioù e krogent da glask laou din. Goude embann « An Ankou » eo bet gwa-

shoc'h. Tud 'zo, pennoù bras zoken, a bouezhe war an embanner. « Vous n'allez pas laisser longtemps ce gauchiste breton politiser notre Spirou ! » Nepell goude em eus roet ma dilez. Setu n'em eus bet tamm digoll, evel-just. Un tamm sot on bet, marteze, met mod-se emañ. Un tamm goude e werzhe an embanner e stal da dud all, digoroc'h a spered...

Ha Franquin, n'en deus ket sikour ?

Lent e oa ar paotr. Ha, dreist-holl, n'en em rente ket kont pegement barrek e oa, pegen brudet e oa. Tra-walc'h e vele bet dezhañ dont dirak Dupuis ha laret : « Se eo 'm eus c'hoant » hag en dije bet.

Penaos oc'h en em gavet da vezañ diskibl ha mignon dezhañ ?

Pa oan bihan e lennen « Le journal de Tintin » ha « Le journal de Spirou » a-drugarez d'ur mignon a oa koumanantet. Tresañ hag adresañ a raen ar

pez a gaven e-barzh. Da 23 bloaz em eus bet tro da vont da levrdu Dupuis e Pariz evit ur sinadeg levrioù. Fellout a rae din kaout un dedi gant Franquin. D'ar mare-se ne oa ket kement a dud ha bremañ o kiask kaout dedioù evel-se. Ur wech dirazañ e kremen spontus. Hag en, jentil-tout, o c'houlenn « Petra hoc'h eus en ho fard (ur c'har-toñs evit an dreserien, ur ger eus bro-Veljeia) ? Diskouezet em eus. Null e oa an tresadennoù hervezon, met Franquin en deus estlammet ha kinniget din sikour evit mont ganin da ziskouez ma zresadennoù e ti Spirou, o c'houlenn ganin pellgomz dezhañ pa velen en em gavet e Brussel. Kuitaat em eus anezhañ, laouen-tre. N'eo ken goude em eus merzet n'em boa ket e niverenn belgomz. E ti Dupuis e Pariz ne lelle ket dezho reiñ anezhi. Ken em eus ranket prenañ anezhi digant un den, 50 lur d'ar mare-se, hep gou-

zout hag an hini wir e oa. Enskrivet e oan e « Istor an arzou » er Sorbonne. Met fellout a rae din tre-sañ. Hor beaj eured hon eus graet gant ur 4L hor boa feurmet da vont da vBrussel, da ginnig ma zresadennoù e ti Dupuis. Skrivet em boa da Franquin ha ne responte ket. An deiz diwezhañ araok lochañ - karget e oa ar c'harr ha tout- en em gav ul lizher gant ar post. Hini Franquin e oa.

Chomet eo ganin an devezh a-bezh, aet on e ti Spirou. Nac'het eo bet ma labourioù. Setu m'en deus kinniget Franquin din dont da labourat en e stal - ul lech sekred n'am boa ket droad da ziskuliañ da zen - ha di ez aen da dremen ur sizhunvez bep daou viz, dre vras. Goude bep prantad ez aen betek, ti Dupuis da ziskouez ma arakadennoù. Ha setu penaos eo bet asantet ganto embann troiù-kaer Bizu e 1967.

Ha bremañ, petra a zo war ar stern ?

Ur c'helenour gant ur mignon bras din, Lax, evit sevel un istor dindan daou levr. Anvet e vo Mustang, diouzh anv ur rouantelezh vitan eus an Himalaya. Asantet eo bet d'an istor dija gant an embanner, Dupuis, evit tremen en e zastumad meur, *Aire Libre*. Kerkent ha ma vo treset 3 pe 4 fajenn ez aimp da welet anezho. Douarivadurioù a rin, gant liv Sina ha kreionoù douarivañ. Traoù n'em eus ket bet tro da implij betek-henn. C'hoant 'm eus souezhiñ ma lennerien.

Petra a blijfe deoc'h tresañ c'hoazh ?

Ur huifre... Troiù-kaer Flatulax, un dialer masklet a gastiz ar re zrouk gant brammadennoù. Stourm a raio ouzh ar sorserezh drouk « la fée Lemolieu ». Fluide Glacial a oa dedennet met morsa n'em eus kavet amzer da gas an istor da benn... Pe c'hoazh « Les Chevaliers ronds de la Table ». Un istor druz, gant harozed pagan ma 'z eus outo.



Evil mont da gerchat Fenekotaa eo ret da Vizu mont d'an Tir Louet : ur vro dañjerus ma zo unan !



DA CHOARVEZOUT E OA...

KO... KOLLET E ANNOUDEGEZH GANTAÑ... SCHNOGBUL! SCHNOGBUL!



FENN-BRENNIG! AR MOGE DENNOO DAONET-SE ZO O TONT EN-DRO... FELEC'H EMAN AR FLEUT?



HAG AR VOUTAILHAD? AET EO AR SEV FENE-KOTOA DA GOLL?

UR SPONT!

NE VERN, BIZU. RE ZO RE DEOMP D'AR GER 'TA!



DEUS, BIZU!

RHEURHEU

DAOUST FELEC'H EMAN AR VOUTAILHAD?



KREFF KREFF!



RHAAAAANRR!



A! EVEL! KENT!

HAG... AR MARCH' ZO TEC'HET



HA NERZH A-WALC'H 'VO GANIN?

REIN! ARIN KALON DIT.



OP!! HEY!



BRAY, BIZU!



AMAJ N'EUS KET A CHAZ MOUGUS KEN, DEDET EO GAN...



EEEEEEEE!



HOT!



ARSA! DA GENTAN KAS SCHNOGBUL D'AN NEEC'H, GOUBE E TELIN DAUIT AR VOUTAILHAD.




SETU!



EVEZH, BIZU.

MAT, AR VOUTAILHAD BREMAJ.





DIGREDUS. UR RANN-FILM EUS "DERRICK" A DREMEN WAR TVB ER MARE-MAN.
PAOUEZ GANT SE HA TENN GOUNID.



KEMENT ALL A DRAOÙ 'ZO D'OBER WAR UN DRAEZHENN. SONJ EN AMZER MA OAS MOUS.



D'AR MARE-SE E OAN EUS AR RE VARREKAN EVIT SEVEL KESTELL-TRAZH.
GRA EN-DRO. CHENCH A RAO DIT...



THE FINAL TOUCH!



DULCI. DEUS DA WELET. ECHU 'M EUS!



AR GWIR OA GANIT. NA VAD E RA CHENCH DOARE.



DA BESKETA EZ AN DEGAS A RIN DEOCH PEA DRA EVIT KOAN PROMETET EO.



MORSE NEN DEUS TAPET TRA UR BURZHLD E VEFE MA... O ! UR MENNOZH A ZELI DIN -



BOTOÙ ROSTET A VO DA GOAN!



EN TAOL MAÑ E RIN BERZH.



SACHAN UN TANN WAR AL LINENN EVIT REIN DEZHAN DA GREZIN E KROGER E BARZH.



PETRA A CHORTOZ EVIT SACHAN WARNI ? SETU BREMAÑ PEMP MUND E HEGASAN ANEZHAN.



NEO KET BET LAZHET AR BLEIZ GANT UN TAOL BOTEZ*

*LAZHAN AR BLEIZ GANT UN TAOL BOTEZ. KAOUT OHAÑ
Ma 'z out etre 4 ha 10 vloaz, ma plij dit an 3 haroz, deus 'ta e klub TUMADOR. Bez' po profoù ha souezhadennoù. Aes-kenañ eo, an holl ditouroù evit emezellañ a gavi war boestoù ar produioù TUMADOR hag a zo e-gwerzh e-barzh stalioù **INTERMARCHÉ** hag **ECOMARCHÉ**




LOEIZ, NE GOMPREAM SEURT. N'EUS KET MUI A VLEIZI EN HOR C'HOAD ABAD E OUZHPEN RANT VL-VAZ.

TEC'NET EN DISE DIOUZH UR ZOO PE DIOUZH UR SIRI.

M'HO PEUS UR GUDENN GANT HAROZED TEC'NET KUIT EUS MOJEMOU 'ZO BEZIT SOUJ EN ADAS DIRSLE-UZH HO SERVU D'AN 02 00 00 00 02!



DISTRROOMP D'AR GER DA ZISKUIZHAR A-RAOK MA TEUFE EN-DRO.



AN'RHOEZ, D'AR MEMES EUR.



Bouhoulck!

Ron!

DEMAT DEOC'N ABAD E DAOU ZEVEZH 'Z EUS UR BLEIZ O TAGAN HON ATANT. TEANNA A RA KALZ O UZH HINI MOJEM AN TRI FEMOC'N BIRAN.

GOUZOUT A-WALC'N A REOMP. UR GASTER BIRAN EA DEUS DEUBET AR BLEIZ EVIT MA SPONTEE E C'HOAR VHAAN. MET TEC'NET EO DRE AR MAEZIOU, SMOAZH, ABALAMOUR D'AN TROUZ HA D'AR SAOTRADUR.



'MAOMP O TONT!



PAKET BRAV OUT, BLEIZ!

HAG AON 'M BIJE OZHIT, PAOURKAEZHIG?

OUZHIN, SET, MET OUTAR YA!



POENT EO DIT ADRAVOUT DA ISTOR, FRAH KOZH!

SIKOUR!

BLEIZ, DIVLAZ EO DA ISTOR NEPDOUT DISTRO EL LEVR KOZH-MAR DRE MEMAR AZE DA BLAS.

HA LEUSKEL A REOMP AR C'NANCH GAREOC'N, 'KEA KAZ ?!



Gabrielle B.

AR MARC'HEG DALL

Dominique hag Alain ROBE

En em vodet eo ar chouanted kozh e kastell Sant-Jesi. Oc'h lritiñ emaint evit lakaat ur roue nevez e-penn ar vro. Jeanne a ya da di Gabrielle da glask war lezerc'h he davez-pried.

HA NEUZE, JEANNE, PERAK KAOUT KEHENT A BRES EVIT DONT D'AN C'HAOUT ?

PERAK VEFE ? ENDET ED EN DA GERZH ?

GOUZOUT A RAN EHAR JIL AHAR.

GAST A BLAC'H !!!

SIOLUN, DIMEZELL JEANNE.

AOL !

UR PLAC'H ELUS DA RENK A RANK DERC'HEL WARMN, N'EO KET Gwir ?

N'EHAN KET JIL AHAR.

ABADE PELL NE ZEU KET KEN, MEMES.

NEUZE ED STEUZIET DA VAT.

AR BREZEL ED ETREZOMP, GABRIELLE. D'AN HINI GENTAR D'E GAOUT DA ZIHEZIR GANTAR !

A GREDIT

KOMPREN LIN TANH, GABRIELLE. NE C'HELLIN KET LEUSHEL DA DREHN. O VONT DA ZIHEZIR E DAMP.

HAG ER DA DEC'HOUL, AL LANFRE !

JEANNE, HA NE VEFE KET GWELLOC'H DIT KLASK GOUZOUT PERAK ED TEL'NET ?

HARTEZE N'EO KET EN AL LANFRE, EN ISTR-SE ...

DIN ED JIL !

MA ZISOËT HORSE, GABRIELLE !

KAS AN ELUS OUZIT, HIG OULZ DA GONZOU BRES ZINDAN.

DIODEZ ! N'EO KET JIL UR C'HOARIELL HA N'OUT KET HUI UR VERC' HIG BINAN. DEN N'EO PERC'HENN WAR DEN. HA ZOKEN TE GANT TOUT DA VADU !

HET GARAN HET AN DRA-HAR EN DA BENN. MORSE N'AZ FO JIL ! MORSE !

KAROUT A RAFEN GOUZOUT DA GEVON, JIL. PERAK OUT AKT ALUT ? HA GWELLAR HIGONN E OMS, HA HARTEZE HUCOC'H. MORSE N'EO ELUS FELLET DIT EN ANZAN.

HET NE GOLLIN KET HA ANZER DA GLASK WAR DA LERC'H.

LINAN ALL A KEBNAN LERKAT AN BODN WARMN, KOUSTO FE GOUSTO. HA TAKOUIDUSOC'H ED NE ELET FORZH PETRA ALL. BROUKLAZHER HA ZAD !

AR MANGA-ED gant A. MORVAN

LÀRET
ZO BET
DIN
E RANKER
LENN AR
MANGA-ED
WAR AN
TU FALL
...



N'EO
KET
GWALL
AES !

A. Morvan

embannet gant :
KEIT VIMP BEV
22, grand rue
29520 LAZ
Pg# : 02.98.26.87.12
Flr : 02.98.26.80.35
keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Moulet gant :
OUESTELIO
505 st. Julien de la Gravière
BP 30708 BREST cedex 02

Pener ar gazetenn
Yann-Fanch JACQ

Kevrenner / Makelenn
Tresañ ar cheñchoù
Owen POHO
owen_poh@wanadoo.fr

Tresadenn ar golo :
NICOBY

Skoazellerenn
Fadrig MARQUAND



Niv. CPPAP : 1005 G 840 75

Istorioù farsus

Apotikerezh

Ur paotr yaouank zo o teskiñ e vicher e ti an apotiker. Desket en deus anvioù an holl louzeier. Un deiz, avat, e kav ur pod-gwer zo skrivet warnañ : *Dilennus*. Mont a ra da ziskouez e gavadenn d'an apotiker.
— Hemañ, eme an apotiker, eo al louzoù a roomp d'an dud pa ne c'hellomp ket lenn skritur ar medisin.

Polez

E ti ar medisin :
— Aotrou, kaset em eus ma merc'h amañ rak krediñ a ra dezhi ez eo ur yar.
— Iskis ! Abaoe pegeit ?
— Abaoe daou vloaz.
— Daou vloaz ! Perak n'oc'h ket deuet da welet ac'hanon abretoc'h ?
— Ma, aotrou... peogwir e kavomp mat ar vioù.

Tresadenn ar miz

Kasit deomp ho tresañ
Ar re wellañ a vo embannet
keit-vimp-bev@wanadoo.fr



Maez 17 vloaz

DARIÛS Gilles SANGLA



